

REFLEXIONOU

CHRISTEN

VAR

REVOLUTION FRANC,

RIMET

EVIT INSTRUCTION AR VRETONET,

Gant an A. Lay,

PERSON PERROS-GUIREC ,

Epad e exil e Brô-Sauz.

*Convenerunt in unum adversus Dominum et
adversus Christum ejus. (Ps. 2i)*



E MONTROULEZ,
EUS A IMPRIMERI LÉDAN.

— 1856. —

Penaus e meus me gallet hoc'h ancouât, va zad?
Ah! n'ho poa grêt em c'hever biscoas nemet peb mat;
Va c'hroui, va c'honservi, ha digass d'am prena
Ho Mab, deus ho complexanç an objet santela.

C'houi eo an urz eternel, ar Mestr oll-buissant,
Sourcen ar berfection, ha me poultr ha neant,
A meus troublet an urz-se, manget d'ho servichi,
Ha neglijet d'ho carout evel un etourdi.

Pardon, va Mestr binniguet : ar vez, ar garante
Hac ar remors assambles a occup va ene.
Me voar e rit ur miracl o tant d'am acquitta ;
Mes ur miracl evidoc'h a so nebeut a dra.

Castiit, sqoît er bed-mâ ; n'en deo qet ho tolliou,
Mes aoun d'ho coll, va Doue, a ra dîn squill daelou :
Chatimant a veritân, a acceptân memes,
Rac ho justiç a garân evel ho madeles.

Sònxit ôn ho crouadur, ha dre adoption
Unan deus ho pugale ; va c'hred, va c'haution
Eo Jesus-Christ e-unan, ho Mab muia-caret :
N'en doc'h evit refusi netra en e reqet.

Nan, birviqen, va Doue, deus ho misericord
Va ene na zizesper, pa meus evit support
Jesus, va mediator : mar deo bras va fec'het,
Brassoc'h eo e veritou. Va accord a so grêt.

En speret a binigen recevit ho clénet,
Da expia pec'hejou ho puez tremenet.
Redoublit hoc'h esperanç, nevezait ho Fe,
Ha grit alies actou a garante Doue.

Hep gortos na vez arru hoc'h amzer diveza,
Pa vo poent testamanti, goulennit da guenta
Sermant deus ho pugale, ma vint a re a re
Catholiqet eveldoc'h ha fidel d'ar güir Fe.

Pa deuyo dêc'h anduri caouajou poan grevus,
En ho torn ar Grucifi, poqit da dreid Jesus,
Hac ho poanniou unissit gant re e bassion ;
En em excitit neuze d'ar güir gontition.

Lavarit gant confianç ha gant ur feiz parfet
Dêc'h oc'h-unan : Va Doue, pa n'am eus eur bêleg,
Ec'h anzavàn va c'hrimou ha va direglamant ;
N'am list qet da berissa var defaut Sacramant.

Evel ar paralitiq, d'am goalc'hi er pincin
Ne meus den ; mes, va Doue, c'houi so ur medecin
Hep applica remejou a rent salo an oll :
Sellit ouzin a druez, ha n'am list qet da goll.

Me ho car a vir galon, hac a so glac'haret
Da veza bet ur moment memes hep ho caret,
Ho madelez infinit, va buez sacrilech,
Ho touçder ha va maliç am eston bep eil gueeh.